



# CHANSON

## AN TRIVACH PLANEDEN.

*Var ton Cloarec Penpout.*

**M**'AM he un tam amzer, pluen, liou ha paper ;  
 Sqient evit merqa, var benn nebeut amzer  
 Me rafe ur reglen var ar goal blaneden  
 Demeus ar c'haëra fleur en em denn da drezen.  
 Qent avañ davantach, e teuàn da c'houlen  
 Sclêrijen ha graçou an trivac'h planeden,  
 Pere a c'houarn tout oll izili an den,  
 Eus a guement a ra hac a ell da gompren.  
 Artez eo ar guenta eus ar blanedennou,  
 Outi dre breferañ e c'houlennàn graçou ;  
 Rac hep caout he graçou ne ouffet qet compren ;  
 Pa zeo hi a c'houarn ar speret hac ar pen.  
 Pa deu din da sonjal em amzer dremenet,  
 Ha laqat va memor en hini da zonet,  
 Va c'halon a lar din, mantret gant ar glac'har,  
 Birviquen va repos n'em be var an douar.  
 Bremàn me zisclêryo ebars en abreg  
 Va flaneden galet tremenet em buc,  
 Evit an effejou sur na recitin qet,

Va c'halon, pa sonjan, a zo cazi raanet.

Ahoue ar moment ma zê bet unisset  
Va eue gant va c'horf, e voa predestinet  
Gant Doue pen-di-ben ar suit va flaneden  
Va brassa plijadur a raje diu anqen.

Ahoue m'on er bed-mâ, me a ell lavaret  
Q ment seurt plijadur zo gauen êruet,  
A zo bet miserabl ar fin eus aneze,  
A scde em c'halon evel lañç pe gleze.

Me meus het an auzer, ia, n'en eus get pell,  
Ma velen er jardin fleurioù caer o sevel;  
Erfiu, me zo trompet em oll bretantion,  
Ne meus nemet piqou da biqa va c'halon.

Ar c'hozec a vis here eo tremenet ar bla  
E rancontris un den pa voan o studia,  
Petrini am pedas da vout d'en asista  
Betec ur plac citet vit va santifia.

Pa voamp êru er plac pini voa assinet,  
Ur femelen yaouanq en deus va decevet,  
Hac e rentas eno va c'halon languissant  
Gant e sellou mignon hac e c'homzou charmant.

Va saludi eure gant guir humilite:  
Piou oc'h u den yaouanq, nac eus a bez contre?  
Ila me respont dezi ebars en eur guer bêr:  
A nep en deus desigu da vout ho servicher.

Excusit, den yaouanq, eus ar vadelez-se,  
Rac ne veritan get caouet an enor-se;  
Mes pa rje din an enor d'er beza annoncet,  
Bezet grêt em andret evel a leveret.

Azeit, plac'h yaouanq, cetu'r scabel aze,  
Vit ma clavin ganech un darn eus ho toate.  
Me garfe, plac'h yaouanq, e larsac'h diu brémân  
Ila me a zo d'ho crad, evel m'en deziran.

Eleal, den yaouanq, me a ell lavaret,  
 Abaone ar moment nia meus bet ho quelet,  
 E zoc'h sur an objet herves va fantazi,  
 Ne zeziran netra nemet vec'h fidel din.

Area la, plac'h yaouanq, me a guemer conge,  
 Eus ho pedi da chom bars er santimant-se.  
 Pet evidou amitie, evel ma zeo dleet,  
 Ha m'ho caro ive gant enor lia respet.

Bet persuadet mal eo guir va freposiou,  
 Na gredit qet an dud gant o goal deodadou;  
 Mac evit prouvi dec'h en ho caran parlet,  
 Ho pedan da retoru ha genta ma effet.

Me ya joais ur vech bete ty va mestrez,  
 Tenzor eus a sçient, rouanes a farnez;  
 Hi eo sur ya frances, hac e deus amitie  
 Evit e zervicher dre guir sincerite.

Bonjour dec'h, va mestres, rouanez ar merc'het,  
 Ho saluti a ran gant enor ha respet,  
 Dre ma zoc'h un objet herves va fantazi,  
 Ur rozen qer brillant hanvet ar fleur de ly.

Ha dec'h pareillamant, den prudant ha den lar;  
 P'o quelan o tonet, e meus calz plijador.  
 Clévet emeus abone e voac'h un den savant,  
 Mes brémàn ho credan, p'o clévan o partant.

Me garfe, va mestrez, nac e lavarfae'h din  
 Ha me a zo d'ho crad ive d'ho fantazi.  
 Ia, va zervicher, c'honi a garan parlet  
 Dreist qement den yaouanq a zo sur var ar bed.

Ma quffen, va mestrez, e ve guir qementse,  
 E ven sur an objet demeure ho carante,  
 Me ho recoupane se demeure a guementse,  
 Hac e vemp unisset dre ar c'brae a Zone.

Eleal, va servicher, mad a ellit credi,

Me rose va bue evit caout hoc'h hinî ;  
 Credit va servicher, ia, pa en touàn,  
 Pa gassen mab ur prinç, biqen dêc'h ne vanqàn.

Va speret so troublet pa sonjån, va mestrez,  
 Hac a ra din credi e zoc'h godisserez ;  
 Mes na gredfen biqen e vee'h capabl da ze,  
 Er lêçon ma lerit emma hoc'h amitié.

Mes donet a rån c'hoas da laqat va speret  
 Erve va fantazi da garet un objet  
 Pehini marteze a raî din mil hirvoud ;  
 Va bue, va maro a zo en he galloud.

Bet persuadet mat eo goir a lavarån ;  
 Guel ve ganén mervel evit ho trahissa ;  
 Mat ec'h allit beza en assuranc a ze ;  
 Me varfe evidoc'h, hac em be mil bue.

Pa zellån eus an col o commanc izellåt,  
 Êru eo an amzer ma zê poent din quittåt ;  
 Na meus qeus da netra nemet n'allån lezel  
 Va c'halon evit test eus va amitié fidel.

Eus a greis va c'halon, den yaouanq, me ho ped  
 Da return adare ha genta ma elfet ;  
 Hir e qavi'n amzer hep clêvet ho toare,  
 Qen a gavin vezo en ur moment un de.

Me ya c'hoas ur veach da di va c'harante,  
 Evit clêvet ganti eur vech c'hoas he doare,  
 Dre m'he deus ranfermet va c'halon er prison,  
 Dre e zellou charmant hac he c'homzou mignon.

Bonjour dêc'h, va mestres, rouanez va c'halon,  
 Oll studi va sqient, va c'honsolation ;  
 C'houi eo a dra certen muia tra a garån  
 A guement zo crouet gant Doue er bed-màn.

Me rent dec'h ar zalud ive, va zervicher ;  
 Abaoue meus ho quelet, e zeus calz a amzer ;

Dislaret a ràn crenn ar pezh a meus laret,  
Dre ur gconclusion a zo deuit em speret.

Va speret ha va c'horf zo e em gonsultet,  
Hac en difin va zouch e meus bet remerquet  
Penos ne voan qet grêt evit an dimezi,  
Hac abalamour dêc'h emeus calz a annui.

Qemerit, va mestres, ul lanç pe ur c'bleze  
Da dreuzi va c'halon, daouest peguer lein ve,  
Hac ne lerit qet din ur gomz evel honnes  
Goude ho peza laqet em c'halon rouanes.

Mes c'houi oc'h eus sqient ha calz eus a brudanç,  
Hac a ello poursu en ur plac all ho chanç;  
Bet persuadet mat ma vizeu destinet  
Da gavet servicher, em bize ho choaset.

Honnes ar bromessa ho poa ta din-me grêt  
Diveza m'am boa bet an enor d'ho quelet?  
An êu hac an douar zo test ar güir Doue,  
Me ho lez da jugi dimeus ar virione.

Erel un ouades a ve' creis ar mor bras,  
Ou heuzet em daclon, o compren em disc'braç,  
O velet an dissign dimeus va flañden,  
Chançhet dimeus a roz ebars en ur spernen.

Qent eguet finissa, emeus c'hoant lavaret  
Un daou pe un tri guer e profit ar voaset,  
Dre ma meus canjolet ebars e pep qartier,  
Se ra din lavaret an dra se a zo sclêr.

M'ho ped, potret yaouanq, pere a rên er bed,  
N'a fiet birviquen e proposition merc'het:  
Ar bromessaou caer a nich evel ar pell,  
Pa sonjer nebeuta a ya gant an avel.

Guelet a rit amàn dre bez seurt promesse  
Da me bet decevet gant ar semelen-se:  
Goulz ha me, tud yaouanq, c'houi ell beza trompet;

Me zo ur plac'hic yaouanq, oajet a bemzeec vla :  
 Rac a meus calz da zioaal n'arufe garéu netra,  
 Rac calz demeus a blac'hét a meus guelel tromplet  
 O tonet da re siout e comizou ar voaset.

C'héni eo certen ar fiéuren eus an nevez amzer  
 A plich sûr d'an dud yaouanq partout dre ar c'harrier ;  
 Mes m'am be-me ar honneur da veza d'ho fantazi,  
 Me eu em gafe eurus certen dreist pepini.

Me a zo un den yaouanq a gar beza secret,  
 N'é bet biscoas eñ sonch da c'hodissa mere'hét ;  
 N'ellau autren eu ho craç hac eu hoc'h amitte,  
 Me ho caro, va mestrez, gant peb fidelite.

An nep a zeu re vuan da gredi d'ar voaset,  
 Lies plac'h a zo tromplet sioas eus o c'hilêvet !  
 N'en deo qet avoalc'h caret beza anavezet,  
 Rac ar voaset so tromplus ha traitour d'ar merc'hét.

Ur plac'h e deus ar maleur na da goll e benor,  
 A deu d'offanci Done ha cassét gant an oll ;  
 Mes divezat voar neuze da zonet da ouela ;  
 An enor pa ve collet n'eller qet da brena.

Ne qet vit coll hoc'h enor nac ho virginite  
 Emeus-me, plac'hic yaouanq, qemeret liberte  
 Da zont da c'houlén ouzoc'h ha c'houi vije contant  
 Da zonet d'am ambarqi bars en ho patimant.

Mar rit din-me an enor da vout er vatimant,  
 Var ben nebeut a amzer ni vo hon daou contant ;  
 Ni labouro nos ha de qen a vezimp rentet  
 Bars er plaç, va mestrezic, oc'h eus design monet.

Avancit ta, den yaouanq, ha deut em batimant,  
 Rac demeus ho proposiou en em gavan contant ;  
 Ho talant hac ho fécon hac ho comzou charmant  
 Ha l'ga em c'halonic calz a gontantantant.  
 Béuigomp ar moment caer eus hon ambarqamant :

E qeiz ma zoc'h abret, me ho ped, dioüalet.

N'en em fiet qet te var ho tiscadurez,  
 Balamour m'oc'h den brao qenebeut var ho furnez,  
 Me an' boa deus an eil ha demeus eguile,  
 Hac a zo bet tromplet o re fiout enne.

Dre ma voan yaouanq, allas! na ouien qet  
 Ar lêçon da zispnt gant godisserezet:  
 Gant o zellou charmant hac o c'homzou qen douç,  
 E laqout ur galon da veza amoureux.

Rac se, potret yaouanq, teulit evez oute,  
 Me ho ped da gredi gant pep sort güirique:  
 Ur plac'h, mar dê pen scan, a rayo ho malc'ur  
 Mes, mar dê coant ha fur, e rayo ho poneur.

## CHANSON NEVEZ,

*Var sujet ur Bassajerez hac un Den yaouanq.*

Var un ton nevez.

**P**ELLEC'HI it-hu passajerez, gant ho paguig vian,  
 D'en em risqa var ar mor evelse oc'h-unan?  
 Ho pisach hac ho genet zo qer caer, qer brillant  
 Evel an eol benignet a zo er firmamant.

Ha rac-se ta, Isabel, va douç, va c'harante,  
 Va aubarqit en ho pag, ma zin ganec'h ive;  
 Va brassa contantamant ha va slijadurez  
 Eo beza ganec'h var ar mor o naviga assambles.

Petra eo ar c'homzou-se oc'h eus lavaret dia,  
 A ya bete va c'halon hac a ra anv diu?  
 Choui, marteze, zo deut evit va godissa,  
 Pe evit clasq ar lêçon da ellout va zomp'a.

Me ho car, va servicher, gant ur galon ardant,  
 Hac am bezo evidoc'h hep seurt fidelite;  
 Biqen dêc'h ne vanqan qeit ha ma vin em bue.

Eleal, va mestrezic, n'hoc'h eus netra collet,  
 Me ho caro ive gant honor ha respet,  
 Hac am bezo evidoc'h ar memes carante  
 A oufac'h caout evidon bete fin va bue.

Poent e demp, va mestrezic, lezel hon discoursion  
 Ha commanç da renvat da vont trezec hor bro,  
 Hac euo pa vimp rentet e vezimp assuret,  
 Rac ar mor zo traitour, fiout ennàn n'aller qet.

Rac-se ta, tud yaouanq, qent eguet finissa,  
 Deut oll d'en em garet vel ma rê an daou-mà,  
 Hac o pezo plijadur an eil gant eguile  
 Mar bevit assamples dre ur guir garante.

F I N.

